

PEDEN

13.

E Plouhinec, an dud a vor
 Ho ped, ho kar, hag hoc'h honor.
 Evito holl, euz an Envou
 Pedit feunteun an oll grassou.

14.

Hor micher zo meurbet risklus,
 Hon labour tenn, kalet, poannius.
 Roit ho pennoz d'ar pesketer,
 Ma vo bara d'an holl er gèr.

15.

Renit hor bag var ar mor glas,
 Hon diouallit bihan ha bras.
 Er gear neuze, eleac'h anken,
 Hon tud a do kalon laouën.

16.

Ho pezit sonj euz hon ene,
 Kreskit hor feiz, hor c'harante,
 Ma zaimp d'an Env, en ho kichen,
 Ganeomp ive eur gurunen.

Réserve.J.-M. Q. *Clementeur*

Imprimatur :

Quimper, 4 Avril 1923.

A. COGNEAU, V. g.

KANTIK

EN HENOR

DA SANT JULIAN

Patron Mortolodet Plouhinec.

*« Amen dico vobis, quamdiu fecistis uni ex his
 fratribus meis minimis, mihi fecistis. »*

(Aviel St Vaze, xxv-40.)

E quirionez, m'hen lavar deoc'h, kement tra o
 pezo great d'an distera euz va breudeur, d'in
 va-hunan eo ho pezo hen great.

VAR DON : E sakramant ar Binijen.

DISKAN

*O Julian, hor Zant patron,
 Ni ho ped holl, a greiz kalon,
 Diskuezit deomp, hed hor buez, } bis.
 Ho kalloud bras, ho karantez.*

1.

E Plouhinec, var-ribl ar mor,
 Var an uhel, 'vel eun Thabor,
 Eur chapel deoc'h zo bet savet,
 Gant tud a vor darempredet.

2.

Pell amzer zo, sant Julian,
 C'hwi zo pedet, karet aman,
 Aman e teu ar pesketour
 D'oc'h henori, da glask sikour.



HISTOR SANT JULIAN

3.

Edo varlerc'h eur mell karo,
Ha fost da skei taol ar maro,
Pa glev eur gomz krenv, souezus,
Hag evitan meurbet mezus.

4.

« Perag ober brezel din-me ?
Beva garfen, eveldout-te !
Muntrer vezi, muntrer kerent. »
Hent fall da vont e bro ar Zent.

5.

Hag eun devez, evel dallet,
E sko varnho eun taol kalet.
Gant an taol-ze, e dud tosta
Zo disframmet euz ar bed-ma.

6.

O Julian, petra peuz gret ?
Penaoz goalc'hi ken bras torfet ?
Goulen pardoun, gra pinijen :
Setu da lod hivižiken.

7.

Guerza deustu ra e zanvez.
E galon vat, e zantelez
Bemdez brema a lugerno,
E holl vreudeur a zikouro.

8.

Sevel a ra eun hospital
Var ribl eur ster treitour ha fall.
Ar garantez, an aluzen,
Netra gwelloc'h 'vit eur c'hristen.

9.

Eun nosvez goany, eur paour keaz lor
A zeu d'e di, c'houlen digor.
E glenved lor hag e gosni
A ra dezhan gwall hirvoudi.

10.

Dirag eun den ken truezus,
E sonj dezhan gwelet Jezus.
Digeri frank ra e galon,
Rag mall en deuz da gaout pardon.

11.

Ha Julian, 'vit e greden,
A vel tenzor an aluzen
Rag e glanvour zeu ken skedus
Ma n'hell beza nemed Jesus.

12.

Neuze perc'hen ar baradoz
Da Julian ra e vennoz.
E bec'hed braz zo pardoune.
Kavet en deuz an eurusdet.